

- 27 -

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

7. SOUN ANN TORTIK

e ti an tortik me zo bet
kalz a draou am euz gwelet

e ti an tortik ema'r cher
'z euz teir logoden oc'h ar ber

teir logoden ha teir raz
hag eun hanter stripou kaz

daou gavel etal an tan
map ha merc'h e peb unan.

ha daou all war leur an ti
map ha merc'h e pep hini.

daou all er park o labourat
hag a ia da heul ho zad.

ha daou all en ti lochen
ha daou all azioc'h he benn

hag ar c'hrek enn he gwele :
gouigour, gouigour adarre.

vvvvv